

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (9)

I

plou, ploue. « Ger pennañ al lec'hanvadurezh vrezhonek » eme Erwan Vallerie, an hini en deus lakaet splann studi hon anvioù lec'hioù da dremen eus arz an divinout hag an ijinañ d'ar studi skiantel rik. Meur a hini all a oa bet o pleal gant ar ger-se, evel Loth, Largillière, Tanguy, met kentoc'h en studiadennoù darnel pe neuze en framm studiadennoù a-bep seurt. Anvioù all a ranker menegiñ, evel hini Fleuriot, met dreist-holl hini Kenneth Jackson. Hennezh, enklasker skosat a live uhel, en devoa pleet gant kement yezh keltiek zo, war-bouez reoù an Henamzer marteze, ha c'hoazh, rak e studiadennoù war ar pikteg a dalvez bepred. Diglok eo ar roll furcherien : bezañ e ranker ivez kaout soñj eus studiadennoù pizh Frañsez Kervella, ha reoù Divi gKervella, renet en brezhoneg. Anaoudegezh don hon lec'hanvadurezh a oa en o speredoù lemm. Pe c'hoazh Jean-Yves Moign studiet gantañ lec'hanvioù Breizh-Uhel, ur spered lemm kemend-all. Al listenn, n'eo ket kloz ! Sede, n'eo ket souezh eta lenn anv Jackson en labour meur Erwan Vallerie war studi istorel an anvioù-lec'h. O daou o devoa diskouezet splann e teu *plou(e)* eus ur ger distaget gant Predeniz [plóïβ]. En taol-mañ e vo kroget gant etimologiezh ar ger. Alies, re alies e lenner e teu *plou(e)* war-eeun eus al latin *plebs* : disklêriañ kement-se n'en deus ster ebet nemet lakaat an atalad (an ekawsion mard eo gwell ganeoc'h) yezhel : *plou(e) = plebs*. Troet eo *plebs* en dielloù, gwir eo, met troidigezh ne dalvez ket maberezh war-eeun etre an eil ger hag egile... Hag evel-se kinnig un istor gwariet, kamm da vihanañ... Lod all o devoa kinniget *plēbem*, akuzativ *plebs*, met ken dibosupl all, evit abegoù re hir da zisplegañ en korf al linennoù-mañ. Hon Erwan a ginnige, eñ, ur *plēbe* evel stumm o vezañ roet *plou(e)*. A c'hall bezañ, diouzh ma zu e kavan gwelloc'h chom war ar c'hinnig fur graet gant *Geiriadur Prifysgol Cymru*, dindan ar ger *plwyf* : *plēb*-, ur stumm beskellek eus *plebs*. Bezet a vezo, an holl a lavar ivez eo stag hon ger ouzh al latin *plebs*. Hep prozeziñ muioc'h. Muioc'h-mui e soñjan-me ez eus bet ur ger all, predeneg tost a-fet stumm ha tost a-fet ster, kroaziet gant an amprest latin, alese hon [plóïβ]. N'em eus prouenn ebet ha n'oc'h ket rediet da grediñ kement-mañ ! Ar ger latin *plebs* (*pleps* ivez en skridoù klasel zo, evel reoù Kikeron) e-unan, tre evel ar ger *populus* (cf. *pobl* en brezhoneg), a vije bet amprestet gant ur yezh all (indezeuropek ? douetus, kentoc'h etruskek, pe ur yezh kozh all en Italia an Henamzer, ha ne vanke ket), ha kement-mañ hervez labour meur Ernout ha Meillet diwar-benn etimologiezh al latin (p. 514a) : « Le mot [*plebs*] ne peut-il être emprunté, comme *urbs*, et, sans doute, *populus* ? ».

En henvrezhoneg e kaved *pluiu* (*Pluiucatoch*, 848, Kartular Redon), *plueu* (*Plueu Eneour*, *Plueu Negued in Pou*, XIvet kd, Kartular Landevenneg), hag ivez *plui* (*Phuilan*, 834), pe *ploi* (*Ploicathnou*, XIvet kantved). Hag alies e veze kavet *plebs* latin (*Plebs Castel*, 875, *Plebs Argar*, IXvet kantved, *Plebs condita Catoc*, 836, Kartular Redon, *Plebs Arthmael*, 835, *Plebs Nevez Porzoet*, XIvet kantved, *Plebs Macoer*, XIe kantved). Ur pebeilañ latin-henvrezhoneg reizh en skridoù a oa savet en latin, dreist-holl...

Met n'eo ket *plebs* ar ger nemetañ hag a gaver da dreiñ *pluiu* pe *plueu* : *parrochia Abennoca* (XIvet kantved) zo *Plabenneg* hiziv, pe c'hoazh *Ecclesia sancti Numenteri* (1163) zo *Plaintel* hiziv, pe *Ecclesia de Sala* (XIvet kantved) zo *Plessala* hiziv, betek *Vicario Demett* (XIvet kantved) zo *Plozeved* hiziv, etc...

Hon *plou(e)* zo aze, pan vez proklitek (da lâret eo lakaet en penn an anv), komprenet en meur a vod. Komprenet e vez evel kreiz relijiel an takad. Ul lec'h a vo kemeret gant ar ger *parrouz* adalek mare ar c'hrennvrezhoneg. Met *ploue* a chomo evel ger dizalc'h, e-maez an anvioù lec'hioù. Evel *Penn-Bloue* en Perwenan, evel ma kaver ur *Pen Blue* en Kernev-Veur. *Ploe* (skrivet evel-se en krennvrezhoneg) a oa ledan-tre an tachennoù-ster anezhañ. Talout a ra kement ha « maezioù », met ivez « douar, bed, bro » hep na vije re resis, ha « parrouz » evel just. Talout a ra c'hoazh « kêriadenn » met ivez an dud zo o chom er gêriadenn. Ma tizoumer an traoù e weler splann e oa ar ger *ploue* merker kreiz buhez an dud. Evel am eus lâret ul lodenn vat eus ar roll-se a vo adkemeret gant ar ger *parrouz* (soñj am eus eus ar pezh a lâre ma mamm din : 'Chomez ket aze evel an iliz en kreiz ar barrouz ! Pan felle dezhi lâret e stroben anezhi en he c'hegin !).

Er yezhoù predenek all e kaver ur ger hañval ouzh *ploue*. Kembreiz o deus *plwyf* ha din da c'hoût ne gaver nemet un anv-lec'h, *Blaen-Plwyf*, en su Aberystwyth, lec'h zo ur peul skinwel pe skingomz (n'em eus ket soñj). Met ar ger, en e vuhez dizalc'h, en deus ur statud par da hini ar brezhoneg : talout a ra ivez kement ha « parrouz », « parrouzianiz », « annezidi ur barrouz ». Hep kontañ troiennoù evel *eghwys y plwyf* « iliz ar bloue », *parson y plwyf* « person ar barrouz », etc, etc.

Hag en kerneveureg e kaver boued ivez : *plu* pe *pluw* eo ar stummoù, *plui* en hengerneveureg. Alies e talvez *plu* kement ha « pobl », evel en anv *Henry Pluysie* troet gant Oliver Padel, gouizieg meur ar c'herneveureg, « Henry of the populace of St Issey parish ». Bezet a vezo ar ger a gaver proklitek en kerneveureg ivez (ar pezh na gaver ket an kembraeg) : *Plualyn*, *Plewegolen*, *Plewgomol*, *Pluysie*, *Puyust*, *Pluvogan*, an holl paramantet gant un anv sant. Anvioù n'int ket ken niverus, pell a vezañ, met savet war ar memes patrom.

Hon ploueoù a vez alies savet gant un anv sant, gwir eo, met ivez gant un anv-gwan bennak : *Pleuveur* (*meur*) en kichen *Pleuvihan* (*bihan*). Amañ eo benel ar ger *plou*-. En gwirionez *plou* a c'hall bezañ pe gourel pe benel.

Un nebeud evezhiadennoù, prederiadennoù marteze : unan eus brasañ *plou* hon bro, er Reter, eo *Plese* (*Plessé* ent-ofisiel) ha hennezh a oa *Plebe qui dicitur Sei*, en 854 (Kartular Redon). Ya, ret eo gwelet penaos eo niverusoc'h, stankoc'h, ar ploueoù en hanternoz ar vro, met kalz bihanoc'h evit reoù ar c'hreisteiz. Kement anvadur lakaet *plebs/plueu* n'eo ket aet betek penn ha takadoù bras a-walc'h, en Kernev-Izel, zo gant anvioù sent hep ar proklitek *plou*- (da skouer *Edern* pan zo ur *Plouedern* en lec'h all). En gwirionez e vefe ret kroaziañ an dafar yezhel (kozh ha bremañ) gant an dafar istorel : ar pezh a oa bet lañset gant studiadennoù Erwan Vallerie hag un nebeud tud all evel Frañsez Kervella.

Arabat ankouaat eo hon *ploueoù* lodenn diveuz un istor kalz koshoc'h ha kemplezh. Ret gortoz an navet kantved evit kaout reveziadennoù ar ploueoù kentañ. Lod a deu war-wel, diwezhat, diwezhat, siwazh ha diwarne e saver a-wezhioù tezennoù. Da skouer *Pleurdud* testeniekaet diwezhat-tre, en 1285, ne ginnig ket an anv *Ildud* hag ar skrivadur ofisiel *Ploërdut* zo unan faos : *oe* a dalvez kement hag *eu*, evel m'en diskouez ar stumm brezhoneg. Anvioù all evel *Pleurtuit*, nepell diouzh Dinarzh, a ginnig un anv *Restud* par d'an hini a gaver en *Llanrhystud* en su Aberystwyth. Un anv-lec'h ankouaet alies gant ar furcherien.

Souezhet e vêr gant ar gont a anvioù sent na gaver ket dik en Kembre nag en Kernev-Veur. Ar respont zo moarvat en tu Domnonea gozh (cf. *Devon* en saozneg ha *Dyfnaint* en kembraeg). Ha komz a raio an dielloù en tu all d'ar mor, un dez bennak ? N'eo ket sur.

Pelloc'h e ranker kaout soñj eus an enbroadur, pe an enbroadurioù, pan lârin mat : pegoulz, pet, niver an dud ? Ur bern goulennnoù zo bet klasket respont oute entre Loth, Chadwick, Fleuriot pe Brett.

Ur meni respont zo moarvat en komprenezon ar pezh zo emsav ar Bagaoded, studiet eus tu an Arvorig gant Fleuriot ha Kerneis. O daou o devoa lakaet en perspektiv an emsav-se hag o darempred gant ar Romaned hag ur skrid latin o reiñ lezennoù kozh (*Excerpta de Libris Romanorum et Francorum*), darn anezhe adkemeret gant lezennoù Kembre (cf. *Lezennoù Hywel Dda*). Fleuriot, yezhour dik hag istorour stummet, en devoa diskouezet splann o orin eus tu Breizh (splann eo ar yezh implijet, hag ar reoù o deus divizet, ya divizet, e oa Fleuriot en gaou, e oa berroc'h o anaoudegezh yezh eget ur milved eus milved hini ur skoliad skol-vamm... Kriz ? Nann, realour). Adarre eo ret pouezañ ne c'hall seurt luziadell bezañ imboure'het diwar skañv. Ret bodañ arbennigourien war meur a dachenn : istor, yezh ha yezhoù, arkeologiezh. Rak, evel ma tiskleir Patrick Galliou : ma zo bet eus enbroadur, en pelec'h emañ an dilerc'hioù arkeologel. Un displegañ bennak zo, met petore hini...

Sede ur pezh trugarez da André-Yves Bourguès evit bezañ kredet kinnig dimp ur pennad studi skiantel, *Réfugiés, envahisseurs ou colons ? Les Bretons insulaires sur le continent*, war un toullad eus ar c'hudennoù-se ha kinniget evel-se un señtezenn lipet eus an teoriennnoù war an dachenn. Ma pouezan war ar pennad-se eo dre m'eo tremen rouez ar pennadoù o kinnig an traoù en doare sioul ha distag diouzh kement from pe feulster...

N'hallan ket, kennebeut, chom hep komz eus labourioù diziouerus Barry Cunliffe ha John T. Koch evel *Celtic from the West – Alternative Perspectives from Archaeology, Genetics, Language and Literature*. Ur sell nevez war donedigezh ar Gelted war wel hag al liammoù strizh etre an daou du eus Mor Breizh. Evel ma lâre John T. Koch, herie eo Breizh su, marteze hent-dall, ar Gelted modern, met en Henamzer e oa Breizh (dindan anvioù all evel *Aremorica*, *Letau*) kreiz sevenadur ar Gelted war an aod atlantel...

plou ha *poull*. Hon anvioù lec'hioù zo farserien pan lâran deoc'h... Un nebeud anvioù zo stummet, war a seblant, war a seblant nemetken, war ar ger *poull* evel *Poulaouen* hag a oa *Ploelouen* c.1330... Pe ivez *Poulann* hag a oa *Ploelan* en 1368... Pe neuze *ploueoù* n'int ket *ploueoù* evel *Ploumanac'h* en Perroz-Gireg, a zo *Poulmanac'h* en gwirionez, ha distaget evel-se c'hoazh gant tud zo eus ar c'hontre, evel am boa klevet gwezhall. Hag anv *Plomarc'h* en Douarnenez eta ? N'eo na *plou* na *poull* ! Met ur *porzh* ! Bezañ e oa *Porzmarch* en 1426.

Ha penaos adkavout er plou all zo eus *Péaule*, staliet entre Muzilhag ha Begann, ar *Plebe qui dicitur Gablah*. Ur *plou* en 876, hervez Kartular Redon. Ha petra soñjal eus *Ploenez*, en Brenniliz herie, hag a oa *Plebe Montis* c.1330 ha *Ploemenez* en 1653. Ur plou bet o koll e statud. Gwelet e vo penaos, en Breizh, evel en lec'h all, zo lec'hioù pennañ deuet da vezañ lec'hioù bihan, uvel, pell diouzh an istor... Sellit penaos *Gwengamp* en deus laeret brud *Plouvagor* hag a oa al lec'hanv pennañ ! Gwelet e vo penaos *ploueoù* o deus kollet tammoù eus o zirioù : evel *Hengoad*, *Pouldouran*, *Trogeri* dispartiet diouzh ar barrouz vras ma oa *Planiel*...

Herve Bihan

Levrlennadur

[a vo roet en dibenn al lodenn diwezhañ]